

Jaffrennou (Taldir)

Teatr Brezoneg Pobluz

Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Taldir, Jaffrennou, bet ganet e Karnoed e 1879, marvet e Bergerac e 1956.
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Tennet eo ar pezh-c'hoari-mañ euz al leor

Teatr Brezoneg Pobluz Karhêz. Moullerez ar Bobl. (1911)

Embannet e oa bet al leor-mañ e Karhêz gand moullerez ar Bobl (kelaouenn Taldir), ha war eun dro e Pariz, e ti Champion.

Al leor-mañ a zo kinniget

D'an Aotrou Emil ar C'hloareg

Mêr Plouian, Kannad Montroulez er Parlamant.

An *Teatr Brezoneg* a oa kouezet en e boull, pa adsavas an Aotrou Ar C'hloareg eur strollad en Plouian. Homañ a roas eun displegadenn gaer-meurbed a Vuhez Sant Gwenole, ar Sul 14 a viz Eost 1898. War an heveleb tro e oe krouet *Kevredigez Broaduz Breiz*, ar genta vreuriezh a spered breizad.

Notenn gand an hini e-neus adskrivet ar pezh-mañ : gouennelourel eo ar pezh-mañ e-keñver ar Barizianed. Mez e vez red lavaret e oa gwir gouennelouriezh a-berz ar Barizianed evid ar Vretoned.

Janedig o vond da Bariz

pez-c'hoari

evit ar merhed yaouank

C'hoariet ar wech kenta en skol Leanezed gwenn

Karnoed

(Miz Gouere 1906)

C'hoariezed

Janedig, peizantez yaouank.

Aogustina, keginerez en Pariz.

Mari-Jan, mamm Janedig.

Marharid, c'hoar Janedig.

Eun itron euz Pariz.

Arvest I

Kevrenn I

Janedig, Aogustina

Janedig

Sell ! Aogustina ! Erru out war da giz da weled da vro eur pennad amzer !

Aogustina

O ! Paz evid gwall-bell, Janedig kêz. Deut on hepken da ober eun tamm pourmenadenn. Daoust ha te 'gav dit e trokfen bremañ ma hêr a Bariz evid ar hoz toull parrouz-mañ !

Janedig

O ! Eur hoz toull parrouz a larez-te ?

Aogustina

Ya, feiz, eun toull... Sell, Janedig kêz, a-boan e oan diskennet deuz an treñ ma poueze an êr-mañ warnon dija ! Ha gwasoh 'ta, plah kêz ! Komprenn ma mamm a zo hanter ampustur, ha beh a-walh am-eus oh intent he hoz brezoneg ! Ya, soñj pemp bloaz 'zo 'on bet hep kaozeal brezoneg ; ne gav ket dit am-eus bet amzer d'ankouaad ma geriou ? Ken asur hag emañ, poan a ra din komz al lañgaj-se.

Janedig

Ma ! me 'gav din n'ankouafen biken ma brezoneg.

Aogustina

Ta ! ta ! Ya, te lar se ! Mez pa ne glever nemed galleg toud ! Neuze 'vez red mad ankouaad ar brezoneg. Evidon-me bepred, me n'on ket evid intent ma mamm. Mez bah ! Eun taol mad a gaer ! Evid pez am-eus da chom emañ 'vad ! Eun eiz deiz bennag ha kuit raktal. Hast am-eus da vond war ma hiz du-ze, ya zur.

Janedig

Ken brao-ze eo Pariz 'ta ?

Aogustina

Plah kêz, an hini n'eo ket 'mêz e doull n'hall ket komprenn pegen kaer eo ar gêr-ze ! Te ne gredez ket ahanon na pa gontfen dit ar wirionez. En Pariz, an noz a zo memez tra 'vel an deiz. En Pariz ne oar ket an nen pegoulz e vez teñval, ken sklêr ma vez ar ruiou, ken skeuduz ma vez an tier hag ar staliou 'bord ar ruiou. Diabarz an tier a luh gand an elektrisite, hag a-walh e vez stoka ar biz deuz eur boton bihan, evid degas ar sklêrijenn hag elumi an oll houlaou asamblez. Na pegen dous eo beva en Pariz 'tal kichenn emañ ! Eno ar merhed yaouank a gav plijadureziou deuz o mod, diduamanchou ha dillad kaer, ar re a zo mil gwech bravoh, evel a welez, evid ar hoefou hag ar horvennou a zouger dre emañ...

Janedig

Ya 'vad, da zillad a zo brao ! Da dok a zo leun a fleur a bep seurt liou. O ! na me 'garje kaoud eun tok e-giz-se !

Aogustina

Ha c'hoaz, plah paour, se n'eo netra ! Ha ma larfen dit peseurt komanant am-eus bet bloaz ! Keginerez 'on en ti bourhizien binvidig-mor hag a ro din... divin ? Pevar-hant lur ar bloaz, ha kazi mann ebed d'ober. An aotrou hag an itron a zo erru koz, ha ne resevont ket nemeur a dud. Hanter-amzer, e ven libr da vond da vale dre gêr, ha da bourmenn leh am-mez c'hoant, gand neb a garan. Den d'an hentcha, den d'am skandalad !

Janedig

Te 'peus chañs, Aogustina.

Aogustina

Chañs ?... Eno, ar mitizien all a hall lavared int ken eüruz ha me. Me a anavez ouspenn deg Bretonnez deuz ar ganton-mañ, hag a zo ivez plaset mad.

Janedig

Êz eo neuze kaoud eur plas mad ?

Aogustina

Me 'oar tri pe bevar blas mad da gemer.

Janedig

Gwir ?...

Aogustina

Ya.

Janedig

Mar kredfen... Kaoud a ra dit mar 'h afen d'unan aneze e ven kemeret ?

Aogustina

Na petra 'ta ! Eur plah koant ha koñsekant evel dout a vez pres d'he hemer, m'hen asur dit, hag hep chipotal. Sell, e-tal du-mañ 'zo eun aotrou hag eun itron, daou vugel deze, hag a houlenn eur plah a-gambr. Sur on e rafes mad o afer. Kant skoed ar bloaz eo ar homanant eno, da gomañs, ha kresk beb bloaz.

Janedig

Ma Jezuz ! Kant skoed ar bloaz !

Aogustina

Ya, kant skoed. Ha gand-se, 'peus ket 'med lared, ha disul e partifom a-gevred.

Janedig

Ya... mez ma mamm !... ma hoar ?...

Aogustina

Eun taol kaer ! Tro brao da gont ha sur out e vi lezet da vond.

Janedig

Me êsao, hag a rento respont dit.

Aogustina

Kenavo neuze, Janedig... Ne gavi gwech ebed ken eun okazion evel honnez !
(*Mond a ra kuit*).

Kevrenn II

Janedig

(*Heh-unan*).

Arsa 'ta ! Rezon he-deus Aogustina. Perag chom dre amañ da frita paourentez pa hallan beza pinvidig hag eüruz en Pariz, kaoud dillajou kaer, mond aliez da bourmen, hag ober d'am fenn ? O ! nann avad ! A briz ebed ne chomin ken amañ. Bon... Sed erru just ma mamm amañ, asamblez gand ma hoar Marharid.

Kevrenn III

Janedig, he Mamm, Marharid

Ar Vamm

Alo, Janedig, poent-braz eo mond da gas ar zaout er-mêz !

Janedig

(faeüz)

Da gas ar zaout ? Pell a-walh on-me bet, 'michañs, o kas hag o kerhad ar zaout, o stleja ma boutou dre an teil, hag o tebri yod silet. Me lar deoh, mamm, ar vicher-ze ne houllan ket ober ken.

Ar Vamm

Ha petra 'ri 'ta, Janedig ?

Janedig

Mond e-kuit ahann.

Ar Vamm

Da beleh, o ! ma Doue benniget ? Ha penaoz e rin-me amañ gand da hoar da zerhel ar vereuri, pa n'eus 'med eur mevel koz ganeom ?

Janedig

Me ah ay da hounid arhant da Bariz, mamm, hag a zikouro ahanoh gwelloh evid na ran dre amañ. En em zikour ma-un a rin ivez...

Marharid

(ankeniet)

O soñjal mond da Bariz out, Janedig ?

Janedig

Ya, Marharid, da Bariz. Te 'zo souezet ? Pariz n'ema ket er penn all d'ar bed. Meur a hini a zo eet a-raogon-me da Bariz !...

Marharid

Ya, meur a hini, siwaz da galz aneze. Mez lar din, me 'bari eo ar goz Aogustina-ze, plah he fompadour, eo he-deus troet da benn dit 'baoe 'ma dre aze ?

Janedig

Na pa defe ? Aogustina 'deus laret ar wirionez din, ha mar pije klevet anezi, te da-un e-pije greet eveldon.

Marharid

Me ? kuitaad ma zud ha ma Bro ?... Gwell ve ganin mervel.

Janedig

Ma ! me 've gwell ganin beva ! Hag evid beva mad hag eüruz eh in da Bariz evel plah a-gambr. Aogustina a oar eur plas mad-tre evidon, gand kant skoed ar bloaz da gomañs, ma boued ha ma lojeiz.

Ar Vamm

Sorhennou an dra-ze, Janedig !Kred kentoh da vamm evid ar galouperez-bro-ze ! Diwall na ves bet touellet, rag keuz a zeufe dit. Evidon, n'hallan ket harz ahanout da bartial, pa'h eo ken kaled-se da benn, mez displijadur vraz a rez din sur ! *(Kregi a ra da ouela)*.

Janedig

Foei, mamm, gouela ! Gwell e ve deoh en em laouennaad, pa laran deoh e tegasin arhant deoh d'ar gêr bewech hag ho-po ezomm...

Marharid

Mar ne ve ket deom da gas dit, kentoh !...

Janedig

Marharid, te 'zo klask goapaad ahanon. Mez gra hardi ! Me 'dapo 'hanout. Te 'n em grigno goude-ze, en eur weled ahanon o sevel, pa chomi-te war da deil ha da billig-krampouez ! Ya, gra da vin hardi ar pezh a gari !

Ar Vamm

Marharid, poan spered am-eus ma gwalh gand Janedig. N'hallan ket pad. Deom ahann. Lezom anezi d'ober he fenn, ar paour-kêz plahig vihan... O ! ma Doue, bet truez ouzom ! Gwerhez Vari, diwallit anezi ! (*Mond a ra kuit*).

Kevrenn IV

Janedig

(*heh-unan*)

Deut on a-benn deuz ma zaol 'vid-se ! Bremañ eo koulz din mond da brienti ma fakajou hag eur gwenneg bennag, ha 'benn disul, yao ! da Bariz asamblez gand Aogustina. Brava planedenn, ma hini !... Sell 'ta, me 'wel Aogustina du-hont... (*Gervel a ra*). Aogustina, yao ?

Kevrenn V

Janedig, Aogustina

Aogustina

Te 'peus galvet ahanon ?

Janedig

Ya, da lared dit 'm-eus gounezet ar barti. Laret 'm-eus da vamm. Partia a rin ganit disul.

Aogustina

A ! A ! Me 'ra eur plah a spered ganit, Janedig. Se 'ziskouez n'out ket ken diwezd hag an darnvuia euz merhed ar barrez. Te, da vihanna, a oar peleh ema da blijadur ha da interest. Ar re-mañ, dre amañ, ne ouiont 'med goro ha turia, ha c'hoaz o-devez poan o tastum eur gwennegig bennag. Te 'peus gouvezet e peseurt tu e oa ar fortun. Ma ! Janedig, deom neuze on-diou ma kanim asamblez eur zon halleg euz Pariz. Sell eur feillenn aze. (*Rei a ra eur paper da Janedig*). Ar Barizianed, plah kêz, ar re-ze 'vad, a oar ober soniou brao, n'eo ket 'vel ar re dre amañ, sur... Foei !

(*O-diou e kanont*)

Dans le jardin d'mon père
Les lauriers sont fleuris,
Cailles et tourterelles
Y vont faire leur nid.

Refrain

Allons, ma mignonne,
Dansons, chantons aujourd'hui !
Allond, ma mignonne,
Venons à Paris.

Cailles et tourterelles
Y vont faire leurs nids
Et la blanche colombe
Et la jolie perdrix.

Allons ma mignonne, etc...

Et la blanche colombe
Et la jolie perdrix
Qui chantent pour les filles
Qui s'en vont à Paris.

Allons, ma mignonne, etc...

Qui chantent pour les filles
Qui s'en vont à Paris,
Qui vont chercher fortune
Bien loin de leur pays.

Allons, ma mignonne, etc...

Qui vont chercher fortune
Bien loin de leur pays,
Et qui seront heureuses
Au Paradis d'Paris.

Et qui seront heureuses
Au Paradis d'Paris.
Et se riront de celles
Qui restent au pays !

Allons, ma mignonne, etc...

Arvest II

Kevrenn I

Janedig

(O skuba hag o frota)

Janedig

Alo, Janedig paour, skub 'ta, frot 'ta ! Ne vo biken re sklêr an traou. An itron a gavo da lared enne c'hoaz. Skub 'ta, frot 'ta, nêta 'ta, an annez eo red dezañ lufra peotramant e vo kroez... *(Dihan a ra da skuba)*. Ya, setu-me amañ unneg miz 'zo bremaig. Me lar deoh am-eus bet digarez da gaoud hir an amzer... Repoz ebed, peuh ebed, sul ebed, ha dalhmad iñsultou, rebechou, kaer am-eus ober euz ma gwella. Ken on deut da veza klañv ha drouglivet... Sellit euz ma min ha larit ar wirionez din... Mar deo Janedig vrao on-me ken, me houll beza... *(Trouz er-mêz)*.

Janedig

Erru eo an Itron. Skub 'ta ! Frot 'ta !

Kevrenn II

Janedig, An Itron

An Itron

Ahanta, dimezell ! N'ho-peus ket an êr da staga kalz war al labour er mintin-mañ ?

Janedig

Ho tigarez, Itron...

An Itron

Hañ ? Petra ? Respont a ra ? Ne blij ket din ar mojou¹-ze. List ahanon da gomz, me ho ped. N'eo ket me ar vestrez ?... Set' ! Ar hantoueller on o paouez kaoud anezañ war daol ar gegin ! Eno 'ma plas ar hantoueller ?

Janedig

'Oan o vond da lakaad anezañ en e blas, Itron, mez gourhemennet ho-poa din daond da zira.

An Itron

Ne gollfet biken ar voaz fall da respont din ! Ne houllan ket se a-grenn ! (*Mond a ra kuit, fumet*).

Kevrenn III

Janedig

(*Heh-unan*).

Ya, ma zud paour, c'hwi 'lar, mez n'eo ket brao beza dindan ar seurt kegennoù. Hag oll ema e-giz-se an oll itronezed amañ, hervez 'welan... Evidon 'vad, tremen skuiz on ganti... Aogustina a ree din promesaou kaer, mez bremañ e welan 'oa gwirroh kaoz ma mamm ! Allaz ! Allaz ! Peleh oh, ma mamm ha ma hoar ? Ouspenn kant leo diouzin ! O ! ma bro Breiz-Izel, tehet on diwar, siwaz din !... Kant skoed ar bloaz eo ma homanant amañ, gwir eo, mez ar hant skoed-se a zeu da zaou-hant lur berr-ha-berr, peogwir an traou torret a vez war ma hont da baea ha da ramplasi. Ha c'hwi 'zoñj ma oan bet kustumet da ziblas plajou ha traou ken fin 'vel ar re dre amañ !... O ! ma Jezuz, pebez buhez ! An aotrou c'hoaz, hennez ne hourdrouz ket kalz, mez an itron... an itron ! Kaoud a ra d'ar Barizianez-se e hall ober gand eur Vretonez evel ma karo. 'Barz en Breiz-Izel, an disterra vatez a zo gwelloc'h deuet gand he mestrou evid na om gand ar vourhizien lorhuz-mañ ! Hag abalamour eh om Breizadezed, e kav dezo e haller lakaad ahanom d'ober an oll labouriou, zoken ar micheriu divaloe ! Mar plij dezo kaoud Bretonezed en o zervij, n'eo ket dre ma istimont aneze, mez abalamour ma hellont ordren deom 'vel ma keront, ni a vez kontant dalhmad... Ha peseurt boued am-eus amañ ! Ar restachou, ha netra ken... Ha ma gwele, o ! ma Zalver ! Eur hoz vatelasenn e-barz eun toull kambr bihan, er bemped estaj... Pa vez yen, e skorn eno ; pa vez tomm, e poah ! Dija on krog da basaad, me ken yah a-raog...

Mouez an itron

Janedig !...

Janedig

Itron !

Mouez an itron

Skubit mad dindan ar gwele !

Janedig

Ober 'ran, Itron.

Mouez an itron

Didumennit² mad ar bandulenn.

Janedig

Ober 'ran, Itron.

Mouez an itron

Ha diwallit mad da feneanti, rag me 'zo 'vond da bourmenn. Prestig en em gavin da weled ho labour. (*Mond a ra da bourmen*).

¹ ar mojou : ar modou, an doareou.

² Didumennit : ? N'etañ mad tumenn ar bandulenn (?)

Janedig

Feneanti ! Me ‘gav din an Itron eo a feneant, deuz ar beure beteg an noz. Me ‘ra labour amañ. An itron ne brizfe ket stoka beg he biz deuz tra ‘bed. Alo, pep tra prest dezi, ha dioustu !...Eur vuhez evel homañ a zo eun ivern... D’ar gêr e rankan distrei, ne zervij ket. Greet am-eus ispiriañs³ deuz Pariz ! Chom hep kaoud sul nag overn, na mann ebed !... Aogustina a bromete din pourmenadennoù hanter-amzer, ya... deuz a-dreñv ! Trist eo ma flanedenn, pa zoñjan petra ‘m-eus kollet o tond amañ... Ha gwasa ‘zo, santoud a ran n’en em zalein ket d’en em gaoud poatriner⁴, ma choman pelloh amañ. Mervel pell euz ar gêr... O ! Doue benniget, na bermetit ket en em gavfe se ganin... (*Gouela a ra*).

Kevrenn IV

(*Ar hloh-dor a zon*)

Janedig a ya da zigeri, hag Aogustina, distruj ha livet fall, a zeu en ti.

Janedig, Aogustina

Te amañ, Aogustina !

Aogustina

Allaz !

Janedig

Na petra out deut da veza ? Feson glañv ah-eus. Unneg miz ‘zo n’am-oa ket adwelet ahanout... abaoe ma’h errujom asmablez er gar Montparnasse...

Aogustina

Janedig !... pardon din beza degaset ahanout amañ !

Janedig

Ya, pardonet out, Aogustina. Mez kont din da zoare ‘ta !

Aogustina

Mar teurvezez selaou ahanon... Ma flanedenn, ma zonkadur, a zo bet kriz meurbed. Pa ‘n em gavis deuz ar gêr da gaoud ma flas gwechall, e oe respontet din e oa bet roet d’unan all, goude ma oa bet prometet mad din. Gwel petra eo komz ar hoz Gallaoued-se ! Peleh mond neuze ? Setu-me da verka ma ano en eur “Bureau de placement“, mez kaer ‘m-oa gortoz, plas keginerez ebed ne gaven, hag en eur miz, am-oa debret kazi ma oll esperniou. Bountet gand an naon hag an dienez, me ‘vond neuze da redeg ruiou Pariz, siwaz din. Ma karjen beza distroet neuze d’ar gêr ! Em bro em-bije kavet eun tamm labour bennag... Me gouezas en eur gompagnunez fall, pardon, o ! ma Doue, hag eno e tastumis ma gwalleur. Eur gwall gleñved am-eus paket, hag eh on antreet neuze en Ospital, leh on bet degemeret der druez... Eur miz on bet eno, ha n’on ket yah-tre c’hoaz. (*Gouela a ra*).

Janedig

Paour-kêz Aogustina ! Da blanedenn a zo trist, gwir eo, mez ma hini a zo ivez. Me a zo amañ en eun ivern, en eun ti leh n’am-eus repoz na peuh, lojet fall, pemp eurvez kousk hepken, kaozeet diouzin ‘vel deuz eur hi !

Aogustina

Janedig kêz... ha me eo a zo penn-kaoz d’az kwalleur, allaz.

Janedig

Aogustina, na gemer ket neh gand se. Ar pezh a zo greet, a zo greet. Mez evidon, ne chomin ket pelloh en toull Pariz-mañ. Me fell din mond d’ar gêr war ma hiz, ha mar ro Doue ar hras din d’erruoud yah adarre e Karnoed, me a ouestl ober teir gwech an dro da chapel Sant Weltaz benniget, war ma daoulin noaz.

³ ispiriañs : skaint-prenet.

⁴ poatriner : klañv ar skevent.

Aogustina

Chañs eh eus, Janedig. Me garje galloud lavared kemend-all, ha retorn du-hont... Pariz brein e-neus kollet din ma enor asamblez gand ma yehed.

Janedig

Perag 'ta ne retornfes ket d'ar gêr ?

Aogustina

Mez n'am-eus ket eul liard !

Janedig

O ! mar n'eus 'med se ! Me 'm-eus gounezet war-dro daou-hant lur, hag eun hanter aneze a brestin dit gand plijadur. Te a rento aneze din pa halli.

Aogustina

Mersi dit, trugarez dit, Janedig ! Pebez kalon vad out ! O ! pegen eüruz e vim da veza 'darre 'barz on bro ! Me a labouro eno evel ma reen kent, ha mar ne zastuman ket a aour, da vihanna em-mo an eurvad hag an evurusted, asamblez gand ma hamaradezed gwechall.

Janedig

Ya, Aogustina, an evurusted e-mesk tu on bro, heñvel diouzim, a gomz eveldom, a zoñj eveldom, eno 'ma ar penn kenta. An neb 'n-eus gwelet ar Barizianed euz a-dost, a oar pegen tud fall int, ha pegen braz eo o dispriz evid ar Vretoned !... Me a roy ma hoñje d'am mestrez 'benn arhoaz hag e tistrofom d'ar gêr asamblez. Na pegement a bres a zo warnon da weled a-nevez touriou koant ma bro, he lanneier braz, he frajou hag he zud ken madelezuz.

Na pegement a hast am-eus da glevoud adarre kaozeal brezoneg dre-oll !...

Aogustina

Ha me 'ta, Janedig ! Bremañ e komprenan pegen koupabl on bet dirag an Aotrou Doue p'am-eus greet dismegañs deuz lañgaj ma mamm.

Janedig

Sell Aogustina, penegwir eh om adarre prest da veza eüruz, ma kerez e kanim eun tamm son vrezoneg eh-eus desket sur koulz ha me, pa oas yaouank. Deut e oa ganin amañ, 'barz ma godell... Kanom anezi asamblez, ha pedom ar Werhez Vari da rei ar hras deom da vired diagent, stag ouz on halon, an diou garantez om bet ken prest da goll aneze ; Karanteze *Doue*, ha karanetz on *Bro*.

Kana a reont beb eil poz ar ganaouenn-mañ⁵ :

O ! ma bro gaer a Vreiz-Izel, ma harantez wirion,
Davedout pa daolan eur zell, trid em hreiz ma halon.

Sed du-hont ar mor glaz-glizin, warnañ goueliou gwenn-kann,
Ouz an aod ar wagenn lirzin a darz en eur ganañ

'Vid gwir out-te perlezon Vreiz, ma mamm-vro Landreger,
Gand traoniennou glaz en ez leiz ha trevajou seder.

Peleh ema bro Leoniz, bro an touriou uhel,
Savet gand ha kant iliz tro da Gastell santel.

En Kerne, na brao eo bevañ en eur skañv ar menez,
Pep tra 'zeblant seder ha glan pa ver tostoh d'an neñv.

⁵ ar ganaouenn-mañ : bet savet gand Abherve. (Notenn a-berz Taldir)

Ha dreist-oll pezh 'ra din tridal eo kavoud tro-war-dro
Roudou tud an amzer gwechall o-deus savet ma bro.

War o roudou, gwir Vretoned ouie divenn o bro,
Ni 'fell deom mond ha ma bez red skuilla on gwad d'on zro.

Sent hag ho-pesu savet er gloar evel eru Vreiz nevez
Grit ma skeudo Breiz an douar, hoh hini 'zo en neñv.
(*neve, ne*).

Ar ridoch a ziskenn.

Taldir, Jaffrennou, bet ganet e Karnoed e 1879, marvet e Bergerac e 1956).

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Embannet e oa bet al lezor-mañ e Karhêz gand moullerez ar Bobl (kelaouenn Taldir), ha war eun dro e Pariz, e ti Chmapion.

Taolenn

Ar Bourhiz lohuz

Ar Barz hag ar Prokolor

Janedig o vond da Bariz

Pontkalleg

Corret ar Henta Grenadour

Eur Votadeg giz nevez

Ar poeltron mezo.

Al leor-mañ a zo kinniget

D'an Aotrou Emil ar C'hloareg

Mêr Plouian, Kannad Montroulez er Parlamant.

An *Teatr Brezoneg* a oa kouezet en e boull, pa adsavas an Aotrou Ar C'hloareg eur strollad en Plouian. Homañ a roas eun displegadenn gaer-meurbed a Vuhez Sant Gwenole, ar Sul 14 a viz Eost 1898. War an heveleb tro e oe krouet *Kevredigez Broaduz Breiz*, ar genta vreuriezh a spered breizad.

AR BOURHUZ LORHUZ

C'hoari fentuz

ar

Bourhiz Lorhuz

en tri arvest

(Reizet a-nevez)

Displeget ar wech kenta en bourk Plouiann
(Thomas Park, rener ar strollad)
en miz Eost 1899.

C'hoarieren

An Aotrou Teo, bourhiz.

E wreg, itron stummet.

Anna, o merh.

Lan ar Miller, peizant yaouank, servijer Anna.

Anastase Mercier, strak aotrou, c'hoantuz Anna.

Per Cocagne, micherour.

Katell, matez ar vourhizez.

Micherourien, Peizanted, Archerien.

Eur plah ostaleri.

An Aotrou Mêr.

KENTA ARVEST

An Aotrou Teo, eur bourhiz pinvidig, a zo e-unan war an teatr. Bale a ra gand eun êr uhel, e gov astennet en a-raog. Komz a ra.

Kevrenn I

Ar Bourhiz

Roi va merh da henez ! Eur peizant ken izel
N'eus ket eur gwenneg toull 'n e di na 'n e hodell !
D'eun den na oar lared na "bonjour" na "bonsoir",
N'anvez⁶ ket ar galleg, 'med brezoneg ne oar !
E dad 'zo eur merour demeuz a reñk dister,
E vamm 'zo bet matez ! N'en-deus na stumm nag êr.
Va merh 'ra 'med gouela, 'ra 'med soñjal dezañ...
War va feiz n'he lezin biken da vond ganatñ !
Beza din daou vil skoed a leve, - ha dihle -
Arhant du-mañ du-hont, hag a-hend-all danve'...

Chom a ra da zoñjal

Me, 'vid gwir, n'ouzon ket ar galleg difazi,
Mez va merhig Anna a zo bet er skol, hi !
Pa 'dez c'hoant e tispieg peziou galleg dinamm..
... En ze, red din anzaou, eo heñvel ouz he mamm !

Va gwreg, daonet 'vin ket, honnez he-deuz eur beg !
Ma ve deg 'eneb dezi, e hounezfe war deg !...
Mez... deom d'ar wirionez. Petra lavarfe 'n dud
O weeld an Aotrou Teo o vond da goll e vrud
'N eur roi e bennherez d'eur peizant er hiz-se ?
Nann ! Gouel pez a gari !... Ne ran forz evid-se.
Gand henez ne di ket.

Gand eur vouez dudiuz :

Me 'anvez unan all,
Eun aotrou euz a gêr, a zo uhel e stal,
Hag a vije mad dit..

Amañ e tigor an nor hag Anna, merh an Aotrou Teo a zeu e-barz.

Kevrenn II

Ar bourhiz, Anna

Ar bourhiz

Hirio out mintin mad.
Deus, va merhig Anna, da roi eur pok d'az tad.

⁶ N'anvez : n'anavez

Anna

Demad, va zad karet.

Pokad a reont an eil d'egile.

Ar bourhiz

Da zaoulagad 'zo ru',

Anna